


I. D'an embregerezh familh d'ar firm transbroadel


Diell 1:Kronologiezh

Ezel ag ur familh greantourien er rannvro Montbéliard, Armand Peugeot(1848-1915) hag e genderv a lañsas produadur ar beloioù e 1886. Met e voe Armand Peugeot dedennet buan get an otoioù. Tad ar c'hentañ Peugeot get eoul-maen e oas e 1891. E 1896 e savas ar gompagnunezh an otoioù Peugeot hag e genderv, enep d'an oto, a viras produadur ar beloioù. Goude marv Eugène, e vibien , a-du get Armand a grouas « Kompagnunezh dizanv* an otoioù hag ar beloioù Peugeot » e 1911.


- E 1912 e voe digor an uzin e Sochaux.
- E 1930 e lañsas an 201, berzh mat evit Peugeot.
- E 1964, Maurice Jordan a voe kentañ rener ar strollad , liamm ebet get ar familh Peugeot.
- E 1976 e voe prenet Citroën d'an embregerezh Michelin hag e voe kendeuzet an daou strollad evit krouiñ ar strollad « PSA Peugeot-Citroën ».
- E 1982 e voe Jacques Calvet , manager** PSA.
- E 1985 e voe digor an c'hentañ uzin e Bro Sina
- E 2001 e voe digor uzinoù e Porto Real e Brazil.




Diell 2: emdro renerezh ar strollad Peugeot a-dal ar blezadoù 1970



Diell 3: dasparzh ar c'hapital***I





	Lec'hioù produiñ	Kreizennoù enklask	Implijidi get 28,8% a vaouezed
Frañs	Aulnay, Poissy, Sochaux, Mulhouse, Rennes, Valenciennes	Vélisy, Sochaux, La Garenne-Colombes, Poissy	108 610
estren vro	Europa: Vigo, Madrid (Spagn). Portugal, Republik Tcheki, Slovakia, Italia Bed: Arc'hantina, Brazil, Sina, Kaero, Maroko, Turkia	Shanghai	Europa: 66 050 Bed: 27 030

1. Get skoazell an dielloù 1 betek 4, deskrivit an embregerezh Peugeot

	En XIXvet kantved	Deroù an Xxvet kantved-blezadoù 1960	Abaoe ar blezadoù 1960
Stumm an embregerezh diell 1 - Ur firm bras - Un embregerezh artizanel ment bihan geti - -an embregerezh broadel bras			
Piv a ren Peugeot? Diell 1-2 -Prezidanted n'int ket izili ag ar familh -familh: re Peugeot a ren			
Piv en em zasparrh gounidoù an embregerezh? Diell 3 -izili ar familh Izili ar familh hag aozadurioù diavaez (bankoù, ensavadurioù..)			
Lec'hioù an uzinoù diell 4 -E pep lec'h er bed -en ur rannvro -broadel			

II. Doare produiñ é kemm



A

B

C

1	1	1	1	2
9	9	9	9	0
0	2	5	7	0
0	5	0	5	0


Diell 5

- 2. Diell 5: Liammit pep skeudenn get ar c’hantved a glot geti.
- 3. Diell 5: Goude bout deskrivet pep skeudenn, roit an termenadur d’ar sistem produiñ ha lec’hiit pep skeudenn ar ar frizenn gronologel: tayloriñ, produadur artizanerezh, produadur emgefreaket (toyotegezh).
- 4. Diell 6: Penaos e kresk ar produadur hag an implijidi etre 1913 ha 1973?
- 5. Diell 7: Peseurt kemmoù produiñ e vez merket ?
- 6. Diell 8: peseurt frazenn en diell 7 a glot get ar skeudenn 8?
- 7. Diell 9: Deskrivit emdro ar produadur etre 1982 ha 2009? Deskrivit ivez emdro an dorn-labour e PSA?
- 8. Diell 4 ha 10: Petra eo an 3 rannvro er bed e lec’h e vez staliet uzinoù a-dal fin ar blezadoù 1980?
- 9. Diell 10: evit piv eo an otoioù produet e Republik Tcheki hag e Slovakia? Petra a ra Peugeot a-benn sachiñ kliented en Amerika latin?

10: BREVED/ sevel ur pennad

Metodologiezh: deskrivit emdro an embregerezh Peugeot a-dal ar blezadoù 1970
Steuñv:

- 1. Tolperezha ha renerezh an embregerezh
- 2. Kemmoù doare produiñ hag efedoù
- 3. Etrevroadeladur an embregerezh



6: Produadur an otoioù ha niver a implijidi e Peugeot

Diell 7: doareoù produiñ nevez

« La grande mutation des années 1980 repose sur l'adoption d'un nouveau système de production, où les stocks de véhicules sont bannis par le just-à-temps, la qualité surveillée et contrôlée par les opérateurs¹, la diversité garantie au client [...].

PSA transforme ses usines au point de les rendre méconnaissables. Des champs de robots ont fleuri sur les lignes de presse² que les OS³, autrefois pourvoyeurs de tôles pour alimenter les machines, ont désertées. Au ferraillage⁴, les caisses sont assemblées et soudées par des automates dont le nombre, parti de zéro en 1980, atteint 2 155 en 1991. Ces robots semblent capables de tout. »

Jean-Louis Loubet, *La maison Peugeot*, Perrin, 2009.

1. Nom désormais donné aux ouvriers 2. Qui produisent les pièces de carrosserie 3. Ouvriers spécialisés 4. Assemblage de la caisse de la voiture.



Diell 8: linenn houarniñ e PSA(Coventry, R-U 2000)

Àr al linenn ar robotoù a zo é strolliñ elfennoù an oto ha soudiñ an oto. Serret eo bet an uzin, newazh ken modern, e 2007

Diell 10: un digoradur àr ar bed

« Outre la réorganisation de l'outil industriel en France, PSA s'est engagé dans un redéploiement international. PSA a construit de nouvelles usines, toutes hors de France, dans les trois grandes zones devenues les marchés de demain, l'Europe centrale, l'Amérique latine et la Chine :

– Usines en République tchèque (2005) et Slovaquie (2006) pour une capacité de 300 000 petites voitures toutes exportables dans la zone PECO¹ et l'Union européenne.

– Installations en Argentine (1998) et au Brésil (2001) où les sites de Buenos Aires et de Porto Real offrent un potentiel global de 200 000 véhicules. Ils assemblent des modèles Peugeot et Citroën pour les marchés du Mercosur², certains étant adaptés aux conditions locales, comme l'utilisation du *flex-fuel*³.


– Enfin, la Chine où les deux marques parviennent à asseoir une politique industrielle d'ampleur à Wuhan pour plus de 200 000 voitures annuelles, dont des modèles très spécifiques comme les 307 Sedan, C-Triomphe ou l'étonnante C2. »

Jean-Louis Loubet, *La maison Peugeot*, Perrin, 2009.

1. PECO : Pays d'Europe centrale et orientale.
2. Marché sud américain.
3. Les moteurs *flex-fuel* permettent au Brésil de rouler avec du bioéthanol dans l'essence.

Véhicules produits

Effectifs salariés




Source : PSA

Diell 9: otoioù product hag implijidi e PSA

III. Emdro ar boblañs oberiant e PSA

Diell 11: an implijidi (micherourien, micherourezed hag estrañjourien en uzin Peugeot e Sochaux



Kresk ekonomikel bras « Tregont blezad klodus »

Kresk ekonomikel é tifounaat

Galv an dorn-labour estren

Muioc'h a vaouezed implijet

PAL:
Deskriviñ ha displegiñ emdro an enbroiñ e frañs en XX vet kantved

5.1: gouzout mareoù pennañ istor politikel ar vro

11. Hervez an diell 11, daoustoc'h ma kresk an dorn-labour en doare ingal etre 1912 ha 2007?
12. Pegoulz e kresk hag e tigrask niver a vicherourien? Roit displegadennoù liammet get stad ekonomikel ar vro?
13. Peseurt rummadoù micherel a gresk ivez ? Perak?
14. Daoustoc'h ma 'z eo daet da vout muioc'h-mui gwregelaat(gwreg) an embregerezh PSA?
15. Pegoulz eo BET galvet ur boblañs obeirant estren ? Perak?



KRONOLOGIEZH

1900-1939: divigad demografel e Frañs(feur genel izel, brezel 1914-1918)

1914: rekizision labourerien drevadennel

1922: kentañ rummad enbroidi a Italia, a vro Belgia, a vro Polonia aozet get ar Stad dre urzh an industrioù (maengleuzioù e Norzh-Pas-de-Calais)

Blezadoù 1930 ha an Eil Brezel-bed:

enepestrañjouriezh ha politikerezh skarzhiñ kuit

1936-1939:enbroiñ bras repuidi a vro Spagn é tec'hel kuit ar brezel diabarzh kaset get Franco.

1945-1974: Tregont blezad Klodus an enbroiñ: dorn-labour estren niverus(Portugal, Maghreb, Afrika), stuzoù-beviñ start er bidondervioù pe oaledoù al labourerien.

1945: krouidigezh Ofis broadel an enbroiñ.


Abaoe 1975: daleet eo an enbroiñ ha goulenn an enframmiñ.

Abaoe 1974: serret eo bevennoù an tiriad gall en arbenn d'an dilabour met aotreet eo ar strolladenn-familh

1982: estrañjourien a zu da vout gall (130 000) get an naturaliziñ pe an euredoù

Prezegennnoù enepestrañjouriezh

Origine des étrangers en millions



6 La population étrangère en France au XX^e siècle







Kompagnunezh dizanv(SA= société anonyme). Embregerezh arc'hantaouet diàr embann ha gwerzhiñ kenlodennoù er Boursen a zo anezhe rannoù kapital an embregerezh.

Kapital(kevala). an argant pe an danvez (mekanikoù) ret evit sevel ha lakaat da vont en-dro un embregerezh.

Kenlodenn(action). ul lodennig ag an embregerezh. Ar perc'henn anezhi a vez paett dezhañ ul lodenn a gounidoù an embregerezh. (lodenn-c'hounit).

Boursen. al lec'h ma vez gwerzhet ha prenet kenlodennoù un embregerezh.

Firm tranbroadel(FTB)= embregerezh liesvroad. un embregerezh a vlegn adstaliou e-maez tiriegezh vroadel ar stal-vamm.

Manager. un implijad implijet evit e varregezhioù a-benn meriñ an embregerezh.

Fordiñ(forderezh). doare ober savet get ar mestri-industri amerikan Henry Ford(1863-1947): roiñ lañs d'ar bevezerezh a-drugarez da c'hoproù uhel; Graet e vez al labour doc'h ar chadenn ha get lusk; ne fiñvant ket ar vicherourien ken en uzin met e c'hortozant e ta ar produ dirak anezhe àr mekanikoù. Gellat a ra ar renerien evezhiiñ kadañsoù(luskoù) al labour. Dont a ra ar produioù da vout standardizet (produet hag oberiet a steud int). En arbenn e vez produet muioc'h e vez lakaet da zigresk ar prizioù.

Tayloriñ-Tayloriezh. doare skiantel da urzhiiñ al labour, peuraozet er SUA get an ijinour Frederick Taylor (1856-1915).

Klasket e veze digejiñ ar jestroù ret evit pep labour industriel a-benn lemel ar jestroù diefed ha muzuliiñ spis an amzer ret evit ober ar jestroù-se a-benn kreskiñ efedusted ar micherour. Anvet eo **Aozadur skiantel a labour.**(ASL)

Toyotegezh. doare produiñ ijinet get an ijinour japonad Taiichi Ono lakaet e-pleustr e Toyota er blezadoù 1975. Diazezet eo àr ur produadur emgefreaket da lâret eo meret get un den a zo é evezhiiñ meur a vekanik hag ivez ar pevar zero (zero berniad pe ur *Just-in-time* a-benn bihanaat ar berniadoù(stock), ar zero si, ar zero stanket, zero dale).

Kresk ekonomikel. emdro ekonomikel àr meur a vlez pe meur a zekvlezad a ziskouez peurvuiañ ur c'hresk eus ar produadur ha gwelladennoù àr al live beviñ.

PDG(PIB). produadur diabarzh gros: hollad ar madoù hag ar servijoù produet get an ekonomiezh vroadel e diabarzh ar vro e-pad ur blez.

Poblañs oberiant. hollad an dud a labour pe a zo é klask labour.

Un enbroad(enbroidi). den daet da chom en ur Stad disheñvel doc'h hani e c'hanedigezh a-benn klask repu, fred, labour...

Ofis broadel an enbroiñ. aozadur-Stad krouet e 1945 a-benn tuta an dorn-labour estren.

Enepestrañjouriezh(xénophobie). ar gasoni enep d'an estrañjourien.

Strolladenn-familh. abaoe 1976 e c'hell ul labourer estren lakaat e famlih da zont(gwreg, gwaz, bugale) e Frañs.